

Katolik ha Breizad bepred !



== Trubuihou ==
An Aotrou Gargam

pe

Torrou-penn an deiz kenta 'r bloaz

Pez-c'hoari farsus e daou Arvest

Gant KLAODA ar Prat (Pluen-Zir)




SANT-BRIEG

Ti-moulerrez Sant-Gwilherm, 27, ball Charner

1909

B
91.
82
EP

Trubuilhou an Aotrou Gargam



10768

F6

891

682

LEP

Katolik ha Breizad bepred !



== Trubuilhou ==
An Aotrou Gargam

pe

Torrou-penn an deiz kenta 'r bloaz

Pez-c'hoari farsus e daou Arvest

Gant KLAODA ar Prat (Pluca-Zir)



SANT-GWILHEM

Ti-mouleraz Sant-Gwilherm, 27, ball Charner

1909



C'hoarierien

AN AOTROU GARGAM, *eun den war an oad o vev*
dioc'h e leve.

BASTIAN, *eur mevel d'an aotrou Gargam.*

FILIBERT, *eur mevel-all.*

BOZEN, *paotr an nor.*

EUR C'HEREOUR.

EUR C'HIGER.

EUR BARAER.

YANNIG, *niz d'an aotrou.*

PAOTR AL LIZEROU.

EUR RENER.

BUGALIGOU EMZIVAD.

LAOU, *unan anezo.*

EUR C'HENDERV D'AN AOTROU.

PEVAR PE BEMP NOUELLER.



Trubuilhou an Aotrou Gargam

ARVEST KENTA

An aotrou Gargam, nevez savet eus e wele, a ya hag a
deu sioulik dre e gambr, evel o ruilh eun dra bouezus en
e benn. Goude eur pennad e lavar :

KENTA DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

Ma chom hirio brao an amzer

Me a redo dre 'l lanneier

War-lerc'h ar glujar hag ar c'had ;

Am bo anezo eur sac'had...

Na diskuiz 'vo o divesker

Ma tec'hont krenn va zennou ter !...

Disadorn, ô pebez dudi !

Evidon-me dizrei d'am zi

Gant eun toulladig gedon brao
 Da ober eun tamm lip-e-bao !...
 Ya, peadra da regali,
 Diou ha teir gwech, holl dud an ti !...
 O feiz, me lar hep fougeal,
 N'eus ket par d'in da chaseal ;
 Me gred oun moumoun sant Hubert
 Ha filhor an aotrou sant Per !

(Klevet a ra trouz)

Piou a c'hell donet ken abred
 D'am dieza a-veac'h savet ?

(Skei a reer war an nor)

Digorit !

EIL DIVIZ

AN A. GARGAM, BASTIAN

BASTIAN

Deiz mad d'an aotrou !

GARGAM

Deiz mad, Bastian ! Mez, m'hen tou !
 Abredik out ganti hirio...
 Asa, lar d'in 'ta petra zo
 P'ema hirio da zivesker
 En hent ken abred hag a yer ?...

BASTIAN

Evit diskouez va c'harantez,
 Em boa c'hoant, en eur seurt dervez,
 Donet abred da reketi
 Eur bloavez mad d'eoc'h en ho ti...

GARGAM

Sell 'ta ! ema ar bloaz nevez !
 Ha me ne daolen ket evez !

(O koms ouz ar zellerien)

N'ankoun 'c'ha ket !

BASTIAN

Ouspenn unan
 D'eoc'h, aotrou mad, a reketan !

GARGAM *(o rei d'ezan eur pezh arc'hant)*

Sed aze, paotr, da galanad ;
 Kendalc'h d'am servicha ervad,
 Kerz aliesoc'h d'ar pod-dour,
 Ha gra kempennik da labour.

BASTIAN

Kenavo, aotrou !

GARGAM

Selaou c'hoaz !
 Va boutou ler hast d'in pourchas,

Ha ro o lein founnus d'ar c'has
 Ma 'z in warlerc'h gedon Koad-Glas !
 Evit tapa louarn pe c'had
 Sevel abred a zo red mad !
 Abred gwir eo ez oun savet,
 Mez aon am eus na ves kropet !

BASTIAN

Monet a ran dioc'htu, aotrou !
(Mont a ra kuit).

TREDE DIVIZ

AN AOTROU GARGAM *(e-unan)*

Ha ma kanfen eur ganaouen
 Savet d'ar chaseour laouen,
 Da c'hedal m'en do ar mevel
 Great e labour evel ma fell ?

WAR DON : *Maturin an Dall.*

N'hoc'h eus ket gwelet dre aman
 Eur chaseour o tiskuiza,
 Gantan chas kaer a vandennad
 A jelp, a red war-lerc'h ar c'had ?
 N'hoc'h eus ket gwelet ar glujar
 O tec'het spontet, 'vel eur yar ?
 Livirit d'in, paotr, plac'h, va den,
 Ma rin ive eur c'haer a abaden !

DISKAN

*Me ho ped, c'houi beachour,
 Frankiz d'ar chaseour,
 A ziruilh mistr ha mibin
 Ama dre ar ribin !
 Dac'hda Fin !... Dac'hda krenn !
 Dre an drez, dre ar spern,
 Danvez d'ober (Trouz en delez) mern !
 Gé !*

Adarre ? *(Skei a reer)* Deuit !

PEVARE DIVIZ

AN A. GARGAM, FILIBERT

FILIBERT *(eur gazeten pe ziou gantan)*

Deiz mad, aotrou !
 Setu ama kazetennou !

GARGAM *(goude beza sellet outo)*

Deac'h da noz em boa o lennet !
 Petra ? n' hoc'h eus envor ebet ?

FILIBERT

Ho tigarez, mar plij, aotrou !
 Piou n'ankounac'ha a-wechou ?...
 Brema, p'eo gwir emañ ganti,
 Me gemer tro da reketi
 D'eoc'h ha d'ho tud eur bloavez mad !

GARGAM

A ! brema e welan ervad
Gwir abeg ho tro finesa !...
Bennoz Doue, ar memez tra,
'Vit hoc'h hefou madelezus !
Delit !...

FILIBERT

Bennoz, aotrou (*d'an dud*)... kintus !
(*Rei a ra d'ezan eur gwennege bennak*)

PEMPVET DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

Asa daonet n' c'heus ket a vez
O c'houlou evel peorien gez ?
Gevier a laront dizamant
En aviz kaout ganen archant.
Hag evelato mantrus eo
Kas anezo diwar va zro
Hep rei d'ezo, d'ar bloavez mad,
Arc'hant daou pe dri chopinad !

(Skei a reer war an nor).

Alo ! a-veac'h m'en deus unan
Dibunet e guden war gân,
Ma teu (*adskei a rea*) unan, daou-all kerkent
Da zon d'ho skouarn-all kement !...
Deuit !... (*izelloc'h*) Kester...

C'HOUEC'HVET DIVIZ

AN A. GARGAM, EOZEN

EOZEN

Eur bloavez mad
D'an aotrou ! Setu va mennad
E deiz kenta ar bloaz nevez
Hon laka holl el levenez !

GARGAM

(*D'an dud*) Va gwenneien dreist-oll ! (*Da Eo-*
[*zen*]) Eozen,
Del ! (*Rei a ra arc'hant d'ezan*)... Taol evez
N'am lesfes dek munut en nor [hiviziken
Da c'houlou diganez digor !

EOZEN

Bennoz Doue ! Hep aon ebet
En noz a zeu kouskit kalet ;
Eozen a ziwallo an nor
Ha den n'en devezo digor !...

(Mont ra kuit)

SEIZVET DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

Randounennou !... M'ho selaoufen
E kollfen prim va zammig penn !...

M'am bije gouezet kement-ma
E vichen eat da neizeta...

(Trouz tud o pignat en delez).

Setu aze, marvad eun-all
Erru, herive, d'agestal! *(Tok! tok! war an nor)*
Deuit!...

EIZVET DIVIZ

AN A. GARGAM, EUR C'HEREOUR

AR C'HEREOUR *(gant eur boutou-ler nevez).*

Digas a ran d'an aotrou,
Hervez e c'houlén, eur boutou;
Great int, m'hen tou! e gwella ler
Landivicho pe e garter!

GARGAM

Setu eur miz zo, amboubal,
Emaoun bemdez oc'h o gedal!

AR C'HEREOUR

Kredit ac'hanon...

GARGAM

Me gred mad!
Aon 'z poa n'az piñe kalanad!...
(O rei eur peñ arc'hant).

Del!... Ha diouall hiviziken,
Pe morse d'az ti n'ez in ken!...
Red eo ober pep tra en amzer zo lakeat:
Fall e ve re abred, ha fall re ziwezad. (1)
Setu lavar eun ar re goz
Lakeat *(Skei a reer)* difazi en eur poz!
Digorit!...
(Ar c'hereour a dec'h kuit pa zigouez ar c'higer er gambr).

NAVET DIVIZ.

AN A. GARGAM, AR C'HIGER *(eur banerad
kig ouz e vrec'h).*

AR C'HIGER

Setu d'an aotrou
Eun toulladig kostezennou,
Evit ober hervez e c'hrad
Gant e vignoned eur pred mad!

GARGAM

Mad tre! It neuze d'ar gegin!...

AR C'HIGER

Araok, aotrou, c'houi a roy d'in
An aotre da reketi d'eoc'h
Eur bloavez mad, bloavez a beoc'h...,

(1) Dioc'h al levr « Furnez ar geiz eus a Vreiz ».

GARGAM

(*D'an dud*) N'en dije ket ankounac'heat
 Goulen ouzin e galanad !
 (*D'ar c'higer*) Leal eo !... Delit !...

AR C'HIGER

Mil bennoz ! (*Mont a ra er-meaz*).

DEKVET DIVIZ

AN A. GARGAM *e-unan*.

It pell diouzin, lapoused noz !
 Ha peur eta ec'h ehano
 Ar glaskerien-ma o zamm tro ?
 Red e vije bet d'in gorren
 Kalz a beziou daou-wenneien !...
 Ma selaouan kement a stran
 Dizale me vo en noaz ran !...
 (*Tok ! Tok ! war an nor*)

Adarre ?... Mont a ran pelloc'h
 Da glask eur c'hornik-all siulloc'h...
 Ha ma c'halvfen va Bastian,
 Ma ouezo da beleac'h ez an !...
 (*Oc'h hopal krenvoc'h-krenva*)
 Hola ! Bastian ! Bastian ! Bastian !...
 (*Skei a reer atao*)

O mevel fall ! Kounnari 'ran !...
 Daoust m'eo va c'halon en anken,
 Lakomp bepred eun dremm laouen !...
 Gouzanv an dud hag an amzer
 A zo daou dra red da ober !...
 Digorit !...

UNNEKVET DIVIZ

AN A. GARGAM, EUR BARAER.

(*AR BARAER (Eur vouchen vad a vara gantan)*).

Deiz mad d'an aotrou !

GARGAM

Ha d'it, va faotr... Perak ama
 E tigasez brema 'r bara ?

AR BARAER

Ho tigarez, mar plij, aotrou !

GARGAM

Ya, ya, gwelet 'ran da droiou !

AR BARAER

Koulskoude gwir a lavaran :
 Blavez mad d'eoc'h a reketan !

Ha d'ar Baradoz ra 'z aio
Hoc'h ene kaer goude 'r maro!

GARGAM

Mad éo! Del 'ta! (*Rei a ra d'ezan gwenneien*)
[Ha sent ouzin,

Kas hiviziken d'ar gegin!

AR BARAER

(*ô vont kuit a lar d'an dud*) :

Ar c'hintus koz ne ro d'in ken
Nemet peziou daou-weneien!

GARGAM

N'eus na bennoz, na trugarez;
Savet int holl evel tud gouez!

DAOUZÉKVET DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

O pebez dervez trubuilhus
Eo hema 'vit an dud peoc'hus!
Mont a ray va stal da stalik
Daoust d'in da veza pinvidik :

« Re vignon d'al largetez

» 'Zigor an nor d'ar baourentez. »

Ar c'henta klasker a deuio
A vo kaset diwar va zro
Da glask kerdenn da Zant-Mikel
Evit trei ganto an avel!
A! siouaz! pegouls echuo
Pelloc'h an dervez-ma e dro?
Inouet oun o rei arc'hant
Da c'hlabouserien diskiant...
N'ez eus enno tamm karantez,
Yen int 'vel ar c'hriša goañvez!...
Ha ma kanfen brema eür zon?
Gwelomp ha me gavo an ton!
Pa vez tenval penn ar Breizad
E kân 'vel eun Iverzoniad;
Pa vez laouen e kân ive,
Ha daoust pe stad bennak e ve...

WAR DON : *Mousig ar Morbihan*

O pebez dervez kasaüs!
Gant o dremmou marmouzus
E teont pep-hini d'e dro
Da rei d'in taol ar maro!...
An torrou-penn-ze a lavar :
« Bloavez mad! o, me ho kar!
Hag adre va c'hein e klevan :
« Hoc'h arc'hant eo a glaskan!
Digorit frank d'ezo ho yalc'h,
Morse ne root a-walc'h!...
A-veac'h m'eo troet o zeuliou
Ma tispennont ho komzou!...

Klaskerien villiget, tec'hit !
 Sunerien 'n em zastumit !
 O pebez dervez kasaüs
 D'an dudou madelezus !...

(Skei a reer taoliou war an nor)

Gwelit ha n'eo ket eun torr-penn
 Beva eur vuez evelen ?...
 Red eo koulskoude digeri,
 Daoust oun, siouaz ! oc'h alteri !
 Petra 've laret 'tal al lenn
 Ma n'heuilhan ar c'hiz penn-da-benn ?
 Digorit !

TRIZEKVET DIVIZ

AN A. GARGAM, YANNIG *(e niz)*

YANNIG

(Ar groaz gantan, a lamm da c'houzoug e eontr)

O va eontr, m'ho kar !
 M'ho kar dreist oll draou an douar !
 Eur bloavez mad ha kals re-all
 D'eoeh, a hetan hep hini fall !...

GARGAM

Te, da vihana, va faotrig,
 A ziskouez kaout eur galonig.

O sell 'ta ! ar groaz 'zo ganez !
 Evit doare e labourez ?

YANNIG

O ya, va zonton Gargamig,
 Mont a ran brao war va fouezig.
 Da c'houlén ouzoc'h kalanad
 Oun deuet hirio, c'houi 'oar ervad.

GARGAM

Hag e kav d'it e c'hellan-me
 Rei arc'hant d'an holl evel-se ?

YANNIG

O ya, va eontr, a-grenn eo red,
 Rak eur weren am eus torret
 War di nevez eur c'hrignouez
 Am lardas druz gant he botez !

GARGAM

Gwir ?

YANNIG

Ouspenn, lazet 'm eus eur yar
 Gant eun taolig mean en he gar.
 Roet 'm eus va ger d'o faea
 Araok kuz-heol-en dervez-ma,
 Gant na vo lavaret netra

D'am zad, d'am mamm, — a oar larda ! —
 N'hellot ket alese finval
 Ken n' am bo bet va ugent real !

GARGAM

Selaou 'ta ac'hanon, Yannig.
 Pa labourez, va mignonig,
 Ez pezo da bez ugent real !
 Hogen, na lar mann d'ar re-all.
 Del !...

YANNIG

(o tilammat da vont er-meaz)

Tapet em eus anezo !...
 D'am zonton mad kenavezo !...

PEVARZEK VET DIVIZ

AN A. GARGAM *(e-unan)*

Tud digalon, amprevaned ! *(Trouz, Tok ! Tok !)*
 Na me zo sod pa roan d'eoc'h kred !
 Va zud koz gwechall, koulskoude,
 War a glevan, a lavare :
 « Oc'h ar pezh na c'haller miret
 « Harpa hep klemm gwella rafet ! »
(Tok ! Tok !)

Ya, ya, ze eo war a welan
 Evidon-me ar gwella rann,
 Digorit !...

PEMZEEK VET DIVIZ

AN A. GARGAM, PAOTR AL LIZEROU

PAOTR AL LIZEROU

Deiz mad d'an aotrou !

GARGAM

Deiz mad, va faotr !

PAOTR AL LIZEROU

Al lizerou

Eo a zigasan d'eoc'h !

GARGAM

Diskouez !...

(Goude beza sellet tost)

Asa, lavar d'in, va faotr kez,
 N'eus ket aze pemp-war-nugent ?

PAOTR AL LIZEROU

Hag a zo gwir, aotrou ; 'velkent
 N'hallen ket digas abretoc'h !

GARGAM

Ne c'houlles ket, lavar kentoc'h !
 Aon bras eo ac'h eus bet marvad
 N'az pije ket a galanad !

PAOTR AL LIZEROU

Kredit ac'hanon...

GARGAM

Ya, me gred

Ez oa 'n deiz-ma ganez gedet !...

(O rei d'ezan e galanad)

Na zale mui hiviziken

Da zigas lizer betek penn.

PAOTR AL LIZEROU *(d'an dud en eur vont kuit)*

Pebez paotr kintus !... Dek kwennek

Na ro ken d'in, ar mec'hiek !...

C'HOUEZEK VET DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

Ouf !... N'hellan mui !... Skuiz-maro on !

Ha peur 'vo diwez d'ar randon ?

Ne jommin pelloc'h da zelaou

Rimadellou ha konchennaou...

Mont a ran d'ober eur bale...

Ar glaskerien a c'hell dale !!!...

(Mont a ra kuit)

Ar ridoj a gouez.

DIWEZ AN ARWEST KENTA.

EIL ARVEST

(Eur strolladig bugaligoù gwisket henvel, a deu er gambr, gant eur beleg pe eun aotrou-all en o fenn. Ar vugale a azez trô-war-dro d'ar Rener. Mall eo gantan sevel pa deu an A. Gargam. Ar vugaligoù a zav ivez. An A. Gargam a ra ar souezet o kaout anezo en e di.)

KENTA DIVIZ

AR RENER HAG AR VUGALE

AR RENER

Ama, me oar, a galon vad

E vimp digemeret timad !

Rak an aotrou Gargam pell zo

Eo skoazel pep tra gaer er vro...

Nag a beorien mezus en noaz,

A red ar gear-ma bemdez c'hoaz,

Hag a vije tennet a boan

Ma lavarjent eur gomz d'ezan !

(O trei oc'h unan eus ar baotred)

Lavar ! Bez' ema ganez, Laou,

Al lizer da lenn d'an aotraou ?

LAOU

Ya, aotrou Rener !

AR RENER

Mad, bremaik

Hen lenni freaz ha goustadik...

(O tisrei oc'h an dud).

Anavezet eo er c'harter

'Vel eun tad, eur madoberer ;

Gantan pep paour a gav bara

Ha zoken dilhad da wiska, *(Trouz en delez).*

Mez klevet a ran trouz aze,

Erru an aotrou, red e ve.....

EIL DIVIZ

AN HEVELEP RE, AN A. GARGAM

GARGAM

A ! c'houi eo, aotrou ker meurbed ?

Gwelit edon dres o tec'het !...

Abaoue ma 'z eo sklear an deiz

N'em eus ket tamm peoc'h, dre va feiz !

Gwech eo Per, gwech Paol, gwech Goulc'hen ;

Leun oa va zi a stranerien...

Ha d'ezo-oll me a ranke

Rei kalanad evit doare...

AR RENER

Ha setu me erru ive...

GARGAM

Her gout a ran ; ema aze,

Em c'haierig, ho kalanad.

D'eoc'h-hu me ro a galon vad,

Rak ma c'houzon an implij kaer

A rit-ganto d'an dud dister...

M'ho ped, chomit 'ta azezet,

Ha c'houi ive, va mignoned...

Hag e lavaren d'eoc'h raktal

Em boa o c'haset da suta,

Da blanta pour war gein Are,

Da vrennika da vene Bre !

Emaint aze gant o zeod flour,

Trenk ha trubard evel an dour,

O konta kant ha kant sorc'hen

Ha n'o deus sur na lost na penn.

Kement em bevez kalonad

O rei d'ar re-ze kalanad

Kement ez on atao eürus

O rei d'an holl beorien peoc'hus !....

AR RENER

Aotrou, c'houi a ra kalz a vad

D'an intañvez, d'an emzivad....

GARGAM

Nan, ober a rajen muioc'h

Ma vijen bet pinvidikoc'h....

*(Ar Rener a ra sin da Laouig da zevel
evit lenn e bennad skrid. Sevel a ra,
hag e krog da lenn raktal).*

» Aotrou benniget, aotreit

» D'ho pugaligou lenn eur skrid

» Evit meuli ho madelez,

» Ho preder hag ho karantez.

» Abredik omp bet dibourvez

» Er bed-ma eus a bep danvez;

» Maro hon tadou, hor mamou,

» Den da bourvei d'hon ezommou,

» P'eo deuet an elez d'hon hench

» Da di an « Itron-Varia ! »

» Gant hoc'h aluzennou dispar

» Omp eürus eno, ni lavar !

» En dervez kenta eus ar bloaz

» Lezit ac'hanomp, eur wech c'hoaz,

» Da reketi d'eoc'h bloavez mad

» Ha kement a zo en ho krad !

(Ar vugaligou-all a strak o daouarn).

» Ni bedo ar Mabig Jezus

» Da viret d'eoc'h yec'hed padus

» Evit ma reot pell c'hoaz ar vad

» D'ar vugaligou emzivad.

(Strakadeg daouarn adarre).

*(An A. Gargam a zav, hag a gemer eur
mouchouar da zec'ha an daeloù a dene-
ridigez a zired eus e zaoulagad. Mont
a ra goude da gaout al lenner ; kemeret
a ra e baper, hag e pok c'houek d'ar
bugel mad).*

GARGAM

C'houi da vihana, bugale,

A zeu d'am digoll a zoare

Dioc'h ar boan benn c'houezet ennon

Gant sunerien laer ha lampon...

Tomma ra va c'halon em c'hreiz

Evel an heol e-kreiz an deiz !

Gant ar garantez e tilamm

Evidoc'h, yaouankizou flamm !...

Na kaerat lizer, sapristi !

A rit d'in aze d'am meuli !...

Mez ruzia rankan gant ar vez

Pa welan e taolit evez

Oc'h va aluzennou dister

'Vel ma 'z eo eur c'hant skoed hanter !

AR RENER

Gant hoc'h aluzen, aotrou ker,

E tebromp eur bara tener,

E wiskomp meur a vinor noaz

Epad daou, tri miz eus ar bloaz !...

(*Ar vugale a stag gant eur ganaouen savet
a ratoz kaer evit ar gouel, war don « Ar
Vamm hag ar Bugel », dioc'h levr
« Mouez an Aochou », gant Glanmor*).

KANAOUEN

Eled an nenv, meulit Doue,
Ha c'houi, evned ive,
En uhelder, embannit-ta
Evez hon. Tad kenta !
D'ar boked nevez digoret,
El liorzou glazet,
Doue a ro gliz ar mintin,
A lintr en heol lirzin !
D'al labousig nevez ganet,
En eun neizig kuzet,
Doue a ro eun tad, eur vamm
Ha n'hen dilezo tamm !
D'ar minorig hep ti na tan,
O c'houzanv kalz a boan,
Doue a zigas e elez,
Tud leun a vadelez !
Hag e roont hep marc'hata
Arc'hant da zornata,
Da dud Doue bet dibabet
Da zevel minored !

(*Adkana ar poz kenta, ma karer*).

GARGAM (*o tiskouez ar vugale*)

O c'hanaouen, aotrou Rener,
D'am diskouarn a zo tener.

Me grede klevet an elez
Du-ze (*en neno*) en o rouantelez !
Gant eur seurt komzou dudiüs
Va holl gounnar zo eat da guz...

AR RENER

Den ganeoc'h ne gavo dilez,
Ker bras ez eo ho madelez !

GARGAM

Bennoz d'eoc'h-oll, bugaligou,
Bennoz 'vit ho kanaouennou;
Gant ho moueziou sklear ha lirzin
Gae oun brema 'vel ar mintin...

(*Goude klask en eur c'haier-godel,
Gargam a ro eur paper-arc'hant
d'ar Rener*).

AR RENER

Kenavezo d'eoc'h, aotrou mad !
Ha bennoz 'vit ho kalanad !...

GARGAM

Tamm 'bet ! Me eo, da vihana,
A galon ho trugareka.
Deuit ken alies hagezom,
C'houi oar peleac'h emoun o chom !
Ho pugaligou a bedo
Evidon keit ha ma vin beo !. (*Ar vugale a
[ya er-meaz]*).

AR RENER

Ha goude ho maro zoken,
N'hoc'h ankounac'haint biken !... (*Mont a*
[er-meaz ive]).

TREDE DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*,

Pegen c'houek ez eo d'am c'halon
Skoazelli ar beorien wirion !
Me o c'har oll evel breudeur
'Zo kouezet warno eur gwaleur.
Oc'h ar re-ma vihan dreist-oll
Laouen ha seder 'vel an heol,
Me gar ober eur zelladen
Pa gouez warnoun eur barr anken.
Setu kompezet va spered,
Ha va c'halon sioul bras meurbed !
Fizians am eus na deuio mui
Kester ebed war-dro va zi...
(Boum ! Boum ! Trouz en delez).
Setu aze c'hoaz eur penn touz !
Goustad ! goustad ! o nag a drouz !...
Mont a ra, ma kar taol evez,
Da derri-souden an delez ! (*Tok ! tok ! war an nor*).
Deuit !...

PEVARE DIVIZ

AN A. GARGAM, AR MEVEL, KENDERV AN AOTROU

AR MEVEL

Ho kenderv eo, aotrou,
A zeu da ginnig e hetou...
(Ar mevel a dec'h kuit kerkent).

GARGAM

Ra 'z ay gant....

AR C'HENDERV

(Laouen bras, digor e ziou-vreac'h)
Kenderv !

GARGAM

Petra zo ?

AR C'HENDERV

Petra ? Ar bloaz nevez hirio !

GARGAM

A !... ya !...

(O skrabat e benn)

AR C'HENDERV

Nag aon am eus-me bet
Na vijec'h en ho ti kavet !

Eur gwall-zarvoud evidoun-me,
Hag evit va c'herent ive !...

GARGAM

Ha, siouaz ! me wel, an darvoud
Ganen a dlie c'hoarvezout....

AR C'HENDERV

Hag ho yec'hed ken talvoudus,
Hag-en hoc'h eus kelou eürus
Da rei d'in hirio anezan ?
Penaos, kenderv, ez it breman ?...

GARGAM

Fall ! Fall ! er mare-ma dreist-oll !

AR C'HENDERV

Setu koulskoude tomm an heol,
Brao eo mont d'ober eur bale ;
Deut oan d'ho pedi 'benn kreiste
Da zont ganeomp-ni da leina,
P'eo gwir omp ho kerent tosta...

GARGAM

Gwaz a ze pa ne c'hellan ket !

AR C'HENDERV

Eur pezh labour am eus boulc'het ;
Hoc'h aliou....

GARGAM

(*D'an dud*) :

Va arc'hant !...

AR C'HENDERV

A zo

Talvoudus bras war va meno.
Hebdoc'h ni a vije diez !...

GARGAM

Hep va arc'hant a levezet ?...

AR C'HENDERV

Gwelit petra c'helfac'h ober....

GARGAM

Netra brema 'vidout, kenderv...
Diwezatoc'h ma vez gallet
Sur mad me yelo d'az kwelet.

AR C'HENDERV

Mad, neuze ez an adarre...
Kenderv, kenavo dizale !...

GARGAM

Kenavo !...

AR C'HENDERV

(*d'an dud en eur vont er-mea*)

Eul lein espernet !

PEMPVET DIVIZ

AN A. GARGAM *e-unan*

Straner milliget, na deu mui
Pelloc'h d'am bouzara em zi !...

Na sod oa an den dievez

A gredas, en eur seurt dervez,

Rei da genta ar galanad

Evit reketi bloavez mad !

Gwelit anezo gwisket ker :

Eus eur penn d'ar penn-all da ger

Ez eont da gonta sorc'hennou

Da gaout arc'hant ha banneou !

(Eur vouez o kana er-meaz)

WAR DON an N° 108 eus *Kantikou brezonek Sant-Brieg*

O pebez burzud a welan

E Betleem pa ziredan !

Eur bugel war ar plouz kousket,

Tost d'ezan e Vamm daoulinet !

Ar ganaouen ken dudius

Eo Nouël ar Mabig Jezus ! *(Hag e kendalc'h
[da zelaou].)*

DISKAN *(Kanet gant pemp paotrig)*

Kanomp Nouël da Vab Doue

Ganet er c'hraou dre garante ;

Da Jezus ha d'e Vamm santel

Kanomp mil gwech Nouël ! Nouël !...

GARGAM

Ha ma rafen d'ezo donet

Er zâl-ma da rei da glevet

O c'hanaouen a levenez,

O nouël war eun ton nevez !...

(Dre ar prenestr) :

N'hellfec'h ket donet eur pennad

Em zi brema da « nouêlat » ?

AR C'HANER

Eo, eo, gant plijadur, aotrou !...

(Sevel a reont).

GARGAM

Ganto n'eus ket a zorc'hennou,

Mes eun nouël ken dudius

En enor d'ar Mabig Jezuz

Am laka meurbed evurus !

Deut tre, bugaligou doujus !

C'HOUEC'HVET DIVIZ

AN A. GARGAM, AR GANERIEN

*(Ar vugaligou o tigouezout a ra an dro d'an A.
[Gargam])*

GARGAM

O ma c'houfec'h, bugaligou,

Pegement a ziezamanchou

Am eus bet hirio ! Bouzaret
 Ez oun, ya sur, oc'h o c'hlevet.
 C'houi da vihana a blij d'in
 Gant ho kanaouennou lirin,
 Kanit, kanit, bugaligou,
 D'ar Mesiaz meuleudiou !
 Bez' pezo gannen kalanad ;
 O rei a rin a galon vad,
 Ha zoken eus ar re gaera
 Am eus roet bete brema.
 Mez kanit c'hoaz eur pennadig
 Eun darn a boziou ho kantig.
 Va c'halon baour a lamm laouen
 O klevet eur seurt kanaouen.

AR VUGALE (*O kana*)

Daoulinet oc'h hien adori
 Ha pastored en-dro d'ezi ;
 En oabl elez gwenn a vanden
 A gân e-kreiz ar sklerijen.
 N'em eus ket ezom da glevet
 Hano 'r bugel nevez ganet !
 Mabig Jezuz, m' her goar ervad,
 C'houi eo va Doue hegarad !
 Kaer eo an heol pa bar en er,
 Kaer bleuniou an nevez-amzer ;
 D'am daoulagad c'hui zo kaeroc'h,
 D'am c'halon karantezusoc'h !

GARGAM

Mad ! kaer-dreist eo, va bugale ;
 Kendalc'hit gant ho tro-vale

Setu ama ho kalanad,
 Rannit gant ho pemp kamalad !...

AR C'HANER BRASA

Bennoz-Doue, aotrou Gargam !
 O, nag eürus e vo hor mamm !

AN A. GARGAM

Kenavo 'ta, ha chans-vad d'eoc'h !
 Digaset hoc'h eus d'in ar peoc'h !!!

(*Mont a reont er-meaz*).

SEIZVET HA DIWEZA DIVIZ

AN A. GARGAM, *e-unan*

M'am eus bet trubuilh em dervez,
 Bet em eus ive levenez,
 Ha n'em bije kavet morse
 E-kreiz va abaden chase.
 Kavout a reer kalonou yen
 A wechou e-touez ar beorien ;
 Mes an nep ro en han' Doue
 Sur mad a zalva e ene.
 En eur gloza, ama m'ho ped,
 Mirit lavar ar Vretoned :
 « *Ma ve pep kalon truezus*
 « *E ve muioc'h a dud eürus !* »

DIWEZ

Landivizio, ar 17 a viz du 1906.

179-5 8-09. — IMPRIMERIE ST-GUILLAUME. — ST-BRIEUC.

